

KIS-605 – En-dro da Zevezh Roparz Hemon

(GE – 10 11 98)

D'an 31 Here e voe aozet e Brest gant *Skol-Uhel ar Vro* “un devezh studi a-zivout oberenn Roparz Hemon”. An Devezh-se, rakwelet da gentañ evit an 19 Gwengolo, oa da vezañ graet e brezhoneg, hag asantet 'm boa kemer perzh er gendael. Soñjet 'm boa e teir dodenn hep bezañ graet c'hoazh va dibab etrezo : Petra en deus Roparz Hemon kemmet en istor ?” “Roparz Hemon barnet gant oberoù e warlerc'hiaded.” “ Hag un dazont zo da oberenn Roparz Hemon ? E derou miz Eost, dre ur c'helc'hlizher, e kemmae *Skol-Uhel ar Vro* e oa ampellet an Devezh, krennet hemañ d'an endervezh hag e ve roet e galleg teir c'homzidigezh diwar bemp. Peditiñ a ris an atebieon da lemel va anv diwar roll ar berzhiaded.

War a'm eus komprenet e felle da aozerion an devezh kendeurel da zifenn Roparz Hemon ouzh ar c'havailh kaset enep dezhañ e meteier brestat ha roazhonat 'zo war zigarez ma kavas gwell lakaat ar brezhoneg da emvataat eus ar Gouzalc'herezh eget engouestlañ er stourm ouzh ar c'houzalc'herion. N'edon ket er gendael ha n'ouzon ket dre be arguzennoù ez arbennas ar gendaelerion. Padal, unan eus ar re-mañ da c'houde en deus bet tro da ziskleriañ din ent prevez e savboent : “Tri hent zo : ar re a zifenn Roparz Hemon en anv Breizh, ar re a dag Roparz Hemon en anv Frañs, an trede hent o vezañ merzhout edo er bloavezhioù-hont an Demokratiezh o stourm ouzh an Naziezh. E se, e ranker emsavlec'hiañ uheloc'h eget Breizh pe Frañs, e par Europa mar karez, gwell : e par istor ar bed en 20t kantved. Dav anzav n'en deus ket Roparz Hemon graet an dibab a zeree.” Ha me : “Hervezout e tlee dilezel pep tra evit mont er Résistance ?” “Ne lavaran ket se, met ar mennozioù en doa...” Aes e hañvalas din respont, hep kendrec'hiñ va emzivizer neoazh : “Ar mennozioù en doa Roparz Hemon zo evel enepdrefuzouriezh Cézanne. Oberenn Cézanne evel oberenn Roparz Hemon, setu pezh zo Istor. An Istor ez eo o oberenn eo a varn anezho. Met piv a vez her a-walc'h evit komz en anv an Istor-se ?”

(RLN da GE – 16 11 98)

Euunik ar frazenn : “Tri hent zo...” Ezkleizelourion ez eus a zo evito an “dereat ent politikel” ur wir gravez. Direüs e vez seurt dereadegezh ha zoken, ouzh ar vevenn, noazus d'ar frankiz : amzere e vefe enta dizalc'hiezh Slovakia ha hini Kroatia pa ouzer pe roll o deus c'hoariet ar Stad slovakiat ambilhet gant an eskob TIZO hag ar Stad kroatiat leviet gant Ante PAVELIC@ e-pad an eil Brezel bed. Hogen pa reer meneg eus se hepken e chomer e-kichen ar blakenn. Evel just hor befe kavet gwelloc'h gwelout TIZO ha PAVELIC@ o kaout un emzalc'h disheñvel e-keñver H ITLER. Met fazioù ha torfedoù an daou benn Stad-se zo bet digarezioù mat da devel war an argraf slovakiat hag an argraf kroatiat e-pad pergont pemp bloaz a renad komunour. Gouarnamantoù Praha ha Beograd a ouie e oa aze argrafoù loskus na vestronient ket mat : ar varksourion o deus bet atav diaesteriù bras o kompren an anadenn vroadel¹.

Slovakiz ha Kroatiz avat o deus kemeret o dizalc'hiezh kerkent m'o deus gallet e ober ha n'int ket aet da c'houlenn e veno digant hon c'hleizelour. Div vloc'henn nevez ez eus bremañ en Europa, hag ur saviad dieiltro zo bet krouet : dister tre eo ar chañsoù evit ma ve adsavet un deiz Tchekoslovakia ha Yougoslavia. “Setu pezh zo Istor”, evel ma skrivez. Anistorek eo evit gwir ar gweladur en deus da gengomzer : ar skritelloù hag ar priziadurioù lakaet a-zave d'an *dereadegezh politikel* a dalvez da oueliañ an argrafoù gwerc'hel ha da skoilhañ ouzh ar c'henderc'hañ istor. Ent istorel emañ ivez ar C.F.D.T. hag ar C.F.T.C. a vremañ e hil ar *C'helc'hioù Katolik Micherour* diazezet gant Albert de MUN ha René de LA TOUR DU PIN. Met pa seller mat, n'eus ket argarzhuc'h eget kealiadurezh tadelour ha henvoazelour ar C'helc'hioù-se, bet savet ouzhpenn se gant ofisourion vrientin o doa kemeret perzh e moustrerezh ar Gumun. Neuze d'ar Goulag tud ar C.F.D.T. hag ar C.F.T.C. ?

E Breizh n'eus ket bet savet ur vloc'henn nevez evel e Slovakia pe e Kroatia. Ha n'eo ket sur e oa hetadus. Ur brezhoneg arnevez zo bet krouet avat ha, pouezusoc'h c'hoazh, e c'hellomp spurmantiñ dre ar yezh nevez-se un hent da ziankañ diouzh an unpreder o ren kalz talvoudekoc'h eget an hent kinniget deomp da skouer gant LE PEN. Evel just, ma ne dalvez ar brezhoneg arnevez nemet da eztaoliñ an unpreder-se, evel ma ra ar perzhiad e *Devezh Roparz Hemon*, ez eus tu da emc'houlenn da betra en deus talvezet *Gwalarn*. Komprenadus eo adal neuze emzalc'h an den e-keñver Roparz HEMON.

¹ N'eus ket gwall bell e'm eus gwelet war ur voger eus La Roche-sur-Yon ar bombezennadur-mañ : “Soutien au prolétariat du Kosovo.” Evel reizh eo gwelloc'h lenn se c'hoazh eget lenn da skouer : “Les Arabes dehors”, met ar bomm-se zo nay. An argraf kosovoat ned eo ket unan proleterel hepken, pell diouzh eno.

(LL da GE – 23 11 98)

Evit a sell Roparz HEMON e savan a-du ganit : “Tel qu'en lui-même enfin...”
Roparz HEMON zo hag a chomo awener *Gwalarn* hag unan eus diazezerion ar yezh arnevez. Pik echu. Desped d'ar pezh a c'hell soñjal tud zo. Desped d'ar pezh a soñje eñ marteze — e vennozioù politikel zo nebeut a bouez : lakaomp e vije aet a du ar Marichal ha goude eus kostezenn DE GAULLE pe me 'oar me petra c'hoazh (soñjomp e CLAUDEL, MAURIAC, MALRAUX ha tutti quanti), pezh a gont eo an ervenn beureun a voe e hini e 1923 betek e varv.

Siriusoc'h : ar pezh a lavarer hiziv diwar-benn Roparz HEMON e-pad ar brezel hag all en deus ur ster na hañval ket e enebourion intent : an turmud a reont, an tagadennoù a-enep Roparz HEMON zo a feur gant ar pouez a gemer hag a gemero *Gwalarn* hag an Emsav. Piv a dagje Roparz HEMON hiziv mar bize marv e oberenn ?